



Charte des festivals engagés pour le développement durable et solidaire en Bretagne

Karta ar festivalioù emouestlet en diorren padus ha kengret e Breizh



engagés pour le développement durable et solidaire en Bretagne



FESTIVAL du
BOUR du monde



Festival
INTER CELTIQUE
Lorient



LES TRANS
MUSICALES
DE RENNES
A T M



Sommaire

1.	Préambule.....	4
2.	Introduction.....	4
3.	Valeurs et finalités partagées.....	6
4.	Objectifs opérationnels.....	6
4.1.	<i>Lutter contre le changement climatique.....</i>	<i>8</i>
4.2.	<i>Préserver la biodiversité, les milieux et les ressources.....</i>	<i>8</i>
4.3.	<i>Participer à la cohésion sociale et la solidarité entre les territoires et les générations.....</i>	<i>8</i>
4.4.	<i>Favoriser l'épanouissement de tous les êtres humains.....</i>	<i>10</i>
4.5.	<i>Permettre une dynamique de développement suivant des modes de production et de consommations responsables.....</i>	<i>12</i>
5.	Mise en œuvre de la Charte.....	14
5.1.	<i>Les modalités de signature.....</i>	<i>14</i>
5.2.	<i>Le protocole d'évaluation.....</i>	<i>16</i>
5.3.	<i>Suivi de la mise en œuvre.....</i>	<i>18</i>

Taolenn

1.	Raklavar.....	5
2.	Digoradur.....	5
3.	Talvoudoù ha palioù boutin.....	7
4.	Palioù pleustrek.....	7
4.1.	<i>Stourm ouzh cheñchamant an hin.....</i>	<i>9</i>
4.2.	<i>Gwareziñ ar vevliesseurted, ar meteier hag an danvezioù.....</i>	<i>9</i>
4.3.	<i>Kemer perzh er c'henstagded sokial hag er c'hengred etre an tiriadoù hag ar remziadoù.....</i>	<i>9</i>
4.4.	<i>Ober d'an holl dud bezañ en o bleuñv.....</i>	<i>11</i>
4.5.	<i>Reiñ ul lusk diorren a glot gant modoù produiñ ha beveziñ atebek.....</i>	<i>13</i>
5.	Lakaat ar Garta e pleustr.....	15
5.1.	<i>Reolennoù sinañ.....</i>	<i>15</i>
5.2.	<i>Ar protokol priziañ.....</i>	<i>17</i>
5.3.	<i>Heuliañ sevenidigezh ar palioù.....</i>	<i>19</i>

1. Préambule

Si l'identité des festivals est d'abord perçue au travers de leurs projets artistiques et culturels, la production de ces manifestations dépasse largement cette unique dimension et constitue un maillage d'actions variées et complexes.

Loin de correspondre à l'image de l'événement festif « machine à rêves », la production d'un festival se confronte à tous les problèmes d'aujourd'hui : transports, gestion de sites, sécurité des publics, santé et prévention des risques vers une population sensible, tourisme, emploi et formation, production de nuisances (sonores, conflits d'usages, déchets variés...), gestion des ressources humaines, déontologie des politiques d'achats des matières et des prestations, etc...

C'est pourquoi, après ce constat de complexité grandissante et donc de fragilisation de leurs objectifs premiers, six festivals bretons se sont tournés vers la réflexion « développement durable et solidaire » dans l'objectif d'assurer justement la durabilité de leurs projets ainsi que d'assumer leurs rôles d'initiateurs et d'acteurs dans un monde social, environnemental et culturel en mutation constante, accélérée par les phénomènes de pollution mondiale.

L'intérêt du collectif est évident : les complémentarités sont multiples et convergentes. Depuis septembre 2005, cette démarche repose sur le travail en commun : l'échange d'expériences, de savoirs, la diffusion d'informations ; le partage autour de problématiques communes a permis la mutualisation des réflexions, l'élaboration de mises en perspectives et la conduite d'expérimentations concrètes vers des solutions adaptées à chaque festival.

Le collectif se définit tout autant dans l'objectif d'évolution que dans la méthode afin d'y parvenir ensemble.

2. Introduction

La diversité culturelle fait écho à la biodiversité naturelle et de fait, la destruction entamée de l'équilibre des écosystèmes animaliers et floraux nous renseigne sur la fragilité des écosystèmes artistiques et culturels. *La Déclaration universelle de l'Unesco sur la diversité culturelle*¹ « érige la diversité culturelle au rang de « patrimoine commun de l'humanité », « aussi nécessaire pour le genre humain dans l'ordre du vivant. »

La comparaison est également pertinente lorsque l'on prend en considération les conditions actuelles de la production et diffusion des œuvres qui uniformisent ou contrarient toute proposition non conforme au moule du marché des industries culturelles.

Les festivals traversent les trois dimensions que le développement durable et solidaire a identifiées comme constitutives de l'activité humaine : écologie, économie et social :

- le champ écologique au travers de la gestion des sites,
- le champ économique par le mode de production spécifique au spectacle vivant,
- le champ social au travers de la relation aux différents publics, artistes, équipes et intervenants, et aux populations.

La relation à l'art, dont la présentation est dépendante de ces trois dynamiques, se situe à cette intersection : environnement, économie, société. En conséquence, la culture est un domaine d'actions où le développement durable et solidaire s'applique à part entière.

Après s'être interrogés sur leur capacité à assurer justement la durabilité de leur projet artistique et culturel et avoir vérifié l'applicabilité du développement durable et solidaire au secteur culturel, les six festivals décident de définir de nouveaux modes de production, d'organisation qui soient respectueux de leur environnement écologique, économique et social et d'appliquer dans un mouvement global et concerté les principes du développement durable et solidaire dans la production et l'organisation de leur manifestation.

Les festivals pensent que ces manifestations culturelles peuvent être dans un avenir raisonnable, écologiquement vivables, socialement équitables et économiquement viables ; ceci pour et dans le respect de la pluralité des formes artistiques et de la diversité culturelle. A cette fin, ils entendent exprimer leur engagement au travers d'une charte.

¹ *Déclaration universelle de l'Unesco sur la diversité culturelle* sur <http://unesdoc.unesco.org/images/0012/001271/127160m.pdf>

1. Raklavar

Merzet e vez identelezh ar festivalioù diouzh o raktresoù arzel ha sevenadurel da gentañ-penn, met e gwirionez ez eus kalz muioc'h a draoù e produadur an abadennoù-se a c'hoarvez eus ur rouedad oberoù liesseurt ha kemplezh.

Pell-mat diouzh skeudenn ar « mekanik da hunvreal » a c'haller kaout eus ar gouel, produiñ ur festival a dalvez plediñ gant an holl gudennoù zo bremañ : treuzdougen, merañ al lec'hioù, surentez an arvesterien, yec'hed ha diarbenn ar riskloù evit an dud kizidik, touristerezh, implij ha stummañ, nozadurioù (trouz, bec'h etre can implijerien, dilerc'hioù a bep seurt...), merañ ar c'hoskor, dleoniezh ar politikerezhioù prenañ danvezioù ha pourchasoù, ha kement zo...

C'hwec'h festival breton eta, pa welent an traoù o tont da vezañ luzietoc'h-luziet hag o falioù kentañ seul vreskoc'h a se, zo troet war-du preder an « diorren padus ha kengret » evit lakaat o ratresoù da badout end-eeun, hag ivez evit sammañ o c'hiriegezh evel krouerien hag obererien en ur bed sokial, endroel ha sevenadurel a cheñch dizehan, buanoc'h c'hoazh gant anadennoù ar saotradur er bed.

Splann eo splot ar strollad : liesseurt eo ar c'henlabourioù ha kas a reont d'ar memes pal. Abaoe miz Gwengolo 2005 e oa bet diazezet ar raktres-se war ar c'henlabour : rannañ skiant-prenet, gouiziegezh, kas titouroù ; ur wezh rannet ar savboentoù war ar c'hudennoù boutin ez eus bet gallet strolañ ar prederioù, lakaat anezho keñver-ha-keñver ha sevel taolioù-arnod fetis evit kavout diskoulmoù a zere ouzh pep festival.

Talvezout a ra ar strollad koulz evit emdreiñ hag evit sevel an hentenn da dizhout ar pal-se asambles.

2. Digoradur

Al liesseurtes sevenadurel a zegas soñj eus ar vevliesseurtes naturel, ha pa weler eo boulc'het distruj kempouez an ekoreizhiadoù loened ha plant e komprener pegen bresk eo an ekoreizhiadoù arzel ha sevenadurel. *Disklêriadur hollvedel an Unesco a-zivout al liesseurtes sevenadurel*¹ « a laka al liesseurtes sevenadurel e renk « glad boutin an denelezh », « ken rekis evit mab-den en urzh an traoù bev. »

Spletus eo ar geñveriadenn-se pa weler penaos emañ kont er mare-mañ evit produiñ ha skignañ oberennoù, pa vez unvanet pe lamet kuit kement kinnig zo disheñvel diouzh patrom ar marc'had renet gant ar greanterezhioù sevenadurel.

Plediñ a ra ar festivalioù gant an teir zachenn zo bet anavezet gant an diorren padus ha kengret evel obererezhioù pennañ mab-den : ekologiezh, armerzh ha tachenn sokial :

- tachenn an ekologiezh gant mererezh al lec'hioù,
- tachenn an armerzh, gant mod produiñ dibar an arvestoù bev,
- an dachenn sokial dre an darempred gant an arvesterien a bep seurt, an arzourien, ar skipailhoù hag al labourerien, hag an dud er vro.

Emañ an darempred gant an arz, zo kinniget e dalc'h an teir zachenn-se, er groashent-mañ : endro, armerzh, kevredigezh. Setu perak ez eo ar sevenadur un domani obererezh ma c'haller lakaat an diorren padus e pleustr penn-da-benn.

Da gentañ eo bet ar c'hwec'h festival o klask priziañ o barregezh da lakaat o raktres arzel ha sevenadurel da badout hag o wiriañ e oa tu da lakaat an diorren padus ha kengret da dalvezout er gennad sevenadurel. Goude-se o deus divizet termeniñ modoù produiñ hag aozañ doujus d'o endro ekolgel, armerzhel ha sokial, ha lakaat e pleustr, asambles ha dre gendiviz, pennaennoù an diorren padus ha kengret evit produiñ hag aozañ o abadennoù.

Soñjal a ra d'ar festivalioù e c'hallo an abadennoù sevenadurel, en un dazont tost a-walc'h, bezañ lec'hioù bevus e-keñver ekologiezh, reizh war an dachenn sokial ha padus e-keñver armerzh ; hag an dra-se a vo graet evit kas war-raok ha doujañ liesseurtes ar stummoù arzel hag ar sevenadurioù diseurt. Evit se e fell dezho embann o emouestl en ur garta.

¹ *Disklêriadur hollvedel an Unesco a-zivout al liesseurtes sevenadurel* war <http://unesdoc.unesco.org/images/0012/001271/127160m.pdf>

3. Valeurs et finalités partagées

Et pour traduire cette ambition, les festivals décident de formaliser leur engagement d'acteurs culturels sur la base de valeurs et finalités de développement durable et solidaire adaptées à leur secteur¹.

- **Affirmer la place de l'être humain et de ses activités au cœur de l'action artistique et culturelle ;**
- **Faire vivre la pluralité des formes artistiques comme fondement de l'action culturelle : on ne saurait juger, formater et/ou restreindre la liberté et les moyens d'expression que les artistes entendent explorer pour assumer la force de leur création ;**
- **Protéger les formes artistiques existantes et aider l'émergence de nouvelles formes ;**
- **Garantir le droit fondamental à la diversité culturelle ou droit des populations à se définir comme des êtres ancrés dans un univers culturel originel ;**
- **Garantir le droit à choisir et vivre sa culture, fondement de la libre expression des populations, possibles publics du spectacle vivant ;**
- **Mettre en place les conditions de liberté du choix, notamment en intégrant toute information objective et dénuée des pressions du marché ainsi que tout projet d'éducation permettant la compréhension des propositions ;**
- **Mettre en place des conditions simples et/ou simplifiées d'accessibilité pour tous les publics aux choix artistiques et culturels ;**
- **Assurer la démocratie participative de l'action en prenant en compte toute dynamique facilitant l'intégration des initiatives et investissements de tous les acteurs concernés ; affirmer le rôle de lien social que joue l'organisation d'un festival.**

4. Objectifs opérationnels

Les objectifs opérationnels traduisent la recherche de durabilité de nos projets dans le mode de construction et de production des événements. Cette recherche vise aussi bien à une gestion économe des investissements nécessaires à la production qu'à un basculement vers un nouveau mode de conception de notre rôle d'acteurs culturels.

Les festivals prennent en compte pour les domaines qui les concernent les quatre axes du référentiel de l'Agenda 21 de la Région Bretagne voté le 29 mai 2008 ainsi que les actions qui leur sont associées :

1. Renforcer la prospérité économique et l'emploi en favorisant des modes de production et de consommation durables ;
2. Renforcer l'équité, l'égalité, la solidarité et la culture pour favoriser l'épanouissement humain, la qualité de vie et la cohésion sociale ;
3. Gérer durablement la biodiversité, le patrimoine et les ressources naturels et lutter contre le changement climatique ;
4. Participer à un développement durable des territoires en bonne gouvernance.

Les festivals se reconnaissent également dans les cinq finalités du cadre référentiel national de l'Agenda 21 local² :

1. la lutte contre le changement climatique,
2. la préservation de la biodiversité, des milieux et des ressources,
3. la cohésion sociale et la solidarité entre les territoires et les générations,
4. l'épanouissement de tous les êtres humains,
5. une dynamique de développement suivant des modes de production et de consommation responsables.

Les festivals décident d'agir et de développer leur activité à long terme en mettant en application les objectifs opérationnels suivants de manière progressive et évolutive.

¹ Comme l'expriment par ailleurs la *Déclaration universelle de l'Unesco sur la diversité culturelle* <http://unesdoc.unesco.org/images/0012/001271/127160m.pdf> et la *Déclaration de Fribourg sur les droits culturels* http://www.aidh.org/ONU_GE/Comite_Drtcult/decla-fribourg.htm

² Site du Ministère de l'écologie, du développement durable et de l'aménagement du territoire : <http://www.ecologie.gouv.fr/-Cadre-de-reference-.html>

3. Talvoudoù ha palioù boutin

Hag evit lakaat ar mennozh-se e pleustr ez eus bet divizet gant ar festivalioù lakaat dre skrid o emouestl a obererien sevenadurel, war ziazez talvoudoù ha palioù a ziorren padus ha kengret azasaet ouzh o gennad¹.

- Kadarnaat plas mab-den hag e obererezhioù e-kreizig-kreiz an obererezh arzel ha sevenadurel ;
- Reiñ buhez d'ar stummoù arzel liesseurt evel diazez an obererezh sevenadurel : ne c'hallfed ket barn, furmadiñ ha/pe strishaat ar frankiz hag an doareoù ezteurel a fell d'an arzourien ergerzhout evit sammañ nerzh o c'hrouidigezh ;
- Gwareziñ ar stummoù arzel zo anezho dija ha sikour stummoù nevez da ziflukañ ;
- Gwarantiñ ar gwir diazez d'al liesseurtes sevenadurel pe gwir an dud da vezañ anavezet evel boudoù gwriziennet en ur metoù sevenadurel orin ;
- Gwarantiñ ar gwir da zibab ha da vevañ e sevenadur, diazez ar frankiz ezteurel evit an dud, zo danvez arvesterien an arvestoù bev ;
- Lakaat e pleustr amveziadoù ar frankiz da zibab, dreist-holl dre zegemer an holl ditouroù objektivel, hep gwaskoù ar marc'had, hag ivez kement raktres deskadurel a c'hall sikour da gompren ar c'hinnigoù ;
- Sevel doareoù eeun ha/pe eeunaet evit ma c'hall an holl dud ober dibaboù arzel ha sevenadurel ;
- Plediñ gant demokratelezh-perzhiañ an obererezh dre zerc'hel kont eus kement tra a c'hall sikour da frammañ intrudu hag emouestl an holl obererien giriek ; kadarnaat ar roll a liamm sokial en devez aozadur ur festival.

4. Paliou pleustrek

Ar paliou pleustrek a dalvez da glask lakaat padout hor raktresoù evit sevel ha produiñ an abadennoù. Klasket e vo mont war-du ur mererezh arboellus eus ar postadurioù zo ezhomm evit produiñ, hag ivez treiñ davet ur mod nevez da empennañ hor roll a obererien sevenadurel.

Ar festivalioù a zalc'h kont, evit an tachennoù a sell outo, eus pevar ahel dave an Agenda 21 a oa bet votet gant Rannvro Breizh d'an 29 a viz Mae 2008 hag eus an oberoù zo liammet outo :

1. Kreskiñ ar binvidigezh armerzhel hag an implij dre harpañ ar modoù produiñ ha beveziñ padus ;
2. Kreñvaat ar reizhded, ar gevatalded, ar c'hengred hag ar sevenadur evit ma vo an dud muioc'h en o bleuñv, evit gwellaat kalite ar vuhez hag ar c'henstagded social ;
3. Merañ, en un doare padus, ar vevliesseurtes, ar glad hag an danvezioù naturel, ha stourm ouzh ar cheñchamant hin ;
4. Kemer perzh e diorren padus an tiriadoù gant gouarnerezh mat.

Degemer a ra ar festivalioù ivez pemp pal framm dave broadel an Agenda 21 lec'hel² :

1. stourm ouzh ar cheñchamant hin,
2. gwareziñ ar vevliesseurtes, ar meteier hag an danvezioù,
3. ar c'henstagded sokial hag ar c'hengred etre an tiriadoù hag ar remziadoù,
4. bleuniadur an holl dud,
5. ul lusk diorren diouzh modoù produiñ ha beveziñ atebek.

Divizout a ra ar festivalioù ober traoù ha diorren o obererezh war hir-dermen dre lakaat ar paliou-mañ e pleustr, tamm-ha-tamm ha gwelloc'h-gwellañ.

¹ Evel embannet a-hend-all e *Disklêriadur hollvedel an Unesco a-zivout al liesseurtes sevenadurel* <http://unesdoc.unesco.org/images/0012/001271/127160m.pdf> ha *Disklêriadur Fribourg a-zivout ar gwirioù sevenadurel* http://www.aidh.org/ONU_GE/Comite_Drtcult/decla-fribourg.htm

² Lec'hienn Ministrerezh an ekologiezh, an diorren padus ha terkerezh an tiriad : <http://www.ecologie.gouv.fr/-Cadre-de-reference-.html>

Les actions énoncées ci-dessous constituent une liste non exhaustive de possibles pour les festivals. Ces orientations sont suggérées et soutenues par les expériences et les réflexions individuelles et collectives. Par ailleurs, les actions peuvent répondre indirectement et simultanément aux autres objectifs opérationnels.

Les actions sont définies comme prioritaires (1) ou de second plan (2).

4.1. Lutter contre le changement climatique

Prenant conscience que certaines activités sont fortement consommatrices d'énergies et ont un impact sur le réchauffement climatique, les festivals sont en capacité d'adopter des pratiques pour en limiter l'impact.

4.1.1 Les transports (1)

- La mise en place de modes de transports collectifs pour la venue des festivaliers,
- L'encouragement des déplacements alternatifs et non motorisés,
- ...

4.1.2 Les économies d'énergies (1)

- La réduction de la consommation énergétique dans tous les domaines de l'organisation du festival : éclairage, transports, utilisation d'appareils électriques, chauffage, sanitaire, restauration, etc.,
- La réduction des consommations d'énergies productrices de gaz à effet de serre,
- L'utilisation d'équipements et matériels économes en énergies,
- L'utilisation d'énergie renouvelable,
- Le choix d'un fournisseur garantissant une part d'énergie renouvelable,
- L'information et la participation des acteurs et des publics aux économies d'énergies, à travers la valorisation des gestes responsables vis-à-vis de la lutte contre le changement climatique,
- La mise en place des outils d'analyse et de suivi des consommations d'énergies,
- ...

4.2. Préserver la biodiversité, les milieux et les ressources

Face à la présence d'un public nombreux, la production des déchets et la consommation de ressources non renouvelables ont tendance à croître de manière excessive.

Réduire l'impact sur l'environnement biologique et par conséquent sur la biodiversité se traduit par une attention active et des comportements responsables.

4.2.1 La gestion des déchets (1)

- La maîtrise de la chaîne de gestion des déchets, en multipliant et en mettant en évidence les points de récupération des déchets,
- La mise en place d'un tri des déchets jusqu'à la valorisation des matières,
- L'information et la participation des acteurs et des publics au tri des déchets, à travers la valorisation des gestes responsables vis-à-vis de l'environnement et des ressources naturelles et non renouvelables,
- ...

4.2.2 Les économies d'eau (2)

- L'utilisation d'équipements économes en eau et en ressources non renouvelables,
- L'utilisation de toilettes sèches, jusqu'au traitement final des matières,
- ...

4.2.3 Les modes de production respectueux et protecteurs de l'environnement (2)

- Le soutien à l'agriculture biologique, à travers la proposition d'une alimentation sans OGM (organismes génétiquement modifiés), issue de l'agriculture biologique, locale ou durable,
- ...

4.3. Participer à la cohésion sociale et la solidarité entre les territoires et les générations

Espaces et moments privilégiés du vivre ensemble, les festivals offrent des territoires de partage et de respect des identités. Leur contribution s'inscrit à la fois dans une non-discrimination dans l'accès aux droits fondamentaux et par la solidarité entre les individus ; ces valeurs étant à mêmes de permettre le développement d'une culture de paix.

L'objectif de cohésion sociale et de solidarité invite les festivals à ouvrir leurs espaces à la rencontre.

An oberoù meneget amañ dindan zo ur roll diglok eus an traoù a c'hall bezañ graet gant ar festivalioù. Kinniget ha diazezet eo an durc'hadurioù-se diwar an taolioù-arnod hag ar prederadennoù hiniennel hag a-stroll.

War un dro hag en un doare dieeun e c'hall an oberoù seveniñ ar palioù pleustrek all ivez. Termenet ez eus oberoù pennañ (1) hag a eil renk (2).

4.1. *Stourm ouzh cheñchamant an hin*

Deuet eo ar festivalioù da gompren ez eus ezhomm kalz a energiezh evit oberoù zo hag e c'hall ar re-se kaout un efed war tommadur an hin. Gallout a reont ober traoù evit ma ne vefent ket ken nozus.

4.1.1 An treuzdouden (1)

- Staliañ doareoù treuzdouden boutin evit kas an dud d'ar festivalioù,
- Broudañ an dud da zont gant karbedoù mod-all ha hep keflusker,
- ...

4.1.2 Arboellañ energiezh (1)

- Ober gant nebeutoc'h a energiezh war gement tachenn zo en aozadur ar festivalioù : gouloù, treuzdouden, implij binvioù tredan, tommerezh, privezioù, predoù hag all,
- Ober nebeutoc'h gant energiezhioù a laosk gazoù efed ti-gwer,
- Implijout aveadurioù ha dafar a arboell energiezh,
- Implijout energiezh nevezus,
- Dibab ur purchaser a warant ul lodenn a energiezh nevezus,
- Reiñ da c'houzout d'an obererien ha d'an arvesterien e vez arboellet energiezh hag o lakaat e-barzh an taol, dre dalvoudekaat an emzalc'hioù atebek evit stourm ouzh cheñchamant an hin,
- Sevel binvioù da zielfennañ ha da heuliañ ar bevezerezh energiezh,
- ...

4.2. *Gwareziñ ar vevliesseurted, ar meteier hag an danvezioù*

Seul niverusoc'h an arvesterien, seul vrasoc'h ar c'hementad lastez hag ar bevezerezh danvezioù annevezus peurliesañ.

Evit ma vo nebeutoc'h a efedoù nozus war an endro biologel, ha diwar-se, war ar vevliesseurted, e ranker teurel evezh bras ha kaout emzalc'hioù atebek.

4.2.1 Merañ al lastez (1)

- Mestroniañ chadenn merañ al lastez, dre lieskementiñ ha lakaat war wel al lec'hioù da adaptout an dilerc'hioù,
- Diveskañ al lastez betek talvoudekadur an danvezioù,
- Reiñ da c'houzout d'an dud e vez divesket al lastez hag o lakaat e-barzh an taol, dre dalvoudekaat an emzalc'hioù atebek e-keñver an endro hag an danvezioù naturel hag annevezus,
- ...

4.2.2 Arboellañ dour (2)

- Ober gant aveadurioù a implij nebeutoc'h a zour hag a zanvezioù annevezus,
- Staliañ privezioù sec'h betek dibenn an tretañ danvezioù,
- ...

4.2.3 Modoù produiñ a zouj hag a warez an endro (2)

- Harpañ al labour-douar biologel, dre ginnig boued hep OGK (organegoù genoù kemmet), diwar al labour-douar biologel, lec'hel pe padus,
- ...

4.3. *Kemer perzh er c'henstagded sokial hag er c'hengred etre an tiriadoù hag ar remziadoù*

Ar festivalioù zo lec'hioù ha prantadoù plijus m'en em gav an dud asambles, tachenoù ma vez rannet ha doujet an identelezhioù. O lod a zegasont koulz dre nac'h ar gwallziforc'hioù a vir ouzh hini pe hini da gaout gwirioù diazez ha dre vroudañ ar c'hengred etre an dud ; rak gant an talvoudoù-se e c'haller diorren ur sevenadur a beoc'h.

Pal ar c'henstagded sokial hag ar c'hengred a vroud ar festivalioù da vezañ lec'hioù emgav.

4.3.1 L'accessibilité de tous les publics (1)

- L'accessibilité des spectacles et de la culture au plus grand nombre, à travers une politique tarifaire différenciée et des abaissements tarifaires jusqu'à la gratuité,
- La prise en compte des difficultés des personnes à mobilité réduite de circuler, d'accéder aux différents espaces et d'être informés,
- ...

4.3.2 La participation à l'économie sociale et solidaire (2)

- La sensibilisation des publics aux difficultés rencontrées par les personnes handicapées,
- Le soutien aux actions de solidarité locale, nationale et/ou internationale,
- L'information des publics sur l'économie sociale et solidaire,
- ...

4.3.3 La diversité culturelle (2)

- La rencontre de projets culturels avec des projets artistiques et pédagogiques, entre populations, entre générations et territoires,
- La contribution à l'éducation artistique,
- La place pour les échanges interculturels,
- Le respect et le soutien à la diversité linguistique,
- ...

La prise en compte du développement durable implique un changement culturel profond dans l'organisation. Ainsi, on peut penser que l'information et la compréhension des principes du développement durable et solidaire par tous les acteurs du festival facilitent leur participation aux programmes d'actions proposées par le festival.

4.3.4 La participation des acteurs et des publics (1)

- L'information et la formation des acteurs et des publics du festival aux principes du développement durable et solidaire,
- Le co-engagement des acteurs et leurs collaborations pour la mise en œuvre des actions,
- L'existence d'une démocratie participative, qui favorise les débats collectifs dans lesquels la participation et l'expression individuelle sont possibles de manière égalitaire,
- Les moyens d'expression pour les publics,
- ...

4.4. Favoriser l'épanouissement de tous les êtres humains

L'objectif d'épanouissement de tous les êtres humains s'inscrit dans le respect de la diversité culturelle et des identités, permettant à chacun de vivre et de choisir librement sa culture et son art. Ainsi, quels que soient les rôles au sein de l'organisation, le festival participe au bien-être et au respect de chaque individu dans ses différences.

4.4.1 L'accueil des publics (1)

- La mise en place des moyens spécifiques pour l'accueil de tous les publics répondant aux besoins d'informations et aux conditions de vie particulières et expérientielles : espaces réservés pour les personnes à handicaps, transports adaptés, espaces d'information et d'expression, etc.,
- La prise en compte des risques liés à la fête, à travers des dispositifs d'information et d'échanges adaptés et la mise à disposition de matériels de prévention et de réduction des risques,
- Le développement d'un programme de médiation culturelle, afin de transmettre à tous les publics la capacité de reconnaître les propositions artistiques du festival et d'opérer des choix librement,
- La possibilité pour les publics de s'impliquer et de participer au projet culturel festival, à travers l'attention portée aux initiatives personnelles ou collectives,
- ...

L'application du développement durable et solidaire ne peut faire l'économie d'une politique juste et égale en termes de gestion des ressources humaines. Parallèlement aux actions déjà mentionnées dans l'objectif de cohésion sociale,

4.4.2 Les acteurs de l'organisation (1)

- L'application de la parité hommes/femmes et de l'égalité des salaires,
- La formation de tous les acteurs du festival, la transmission des connaissances,
- L'attention sur les modes de gestions des ressources humaines des fournisseurs choisis,
- ...

4.3.1 Degemer an holl (1)

- Reiñ an tu d'ar muiañ ar gwellañ a dud da vont d'an abadennoù ha d'ober o mad eus ar sevenadur, dre ginnig prizioù a-ziforc'h, bilhedoù marc'hadmat pe digoust zoken,
- Derc'hel kont eus an diaezamantoù o devez an dud nammet o vont ha dont hag o klask gouzout hiroc'h,
- ...

4.3.2 Perzh en armerzh sokial ha kengret (2)

- Kizidikaat an dud ouzh an diaezamantoù o devez an dud nammet,
- Skoazellañ an oberoù evit ar c'hengred lec'hel, broadel ha/pe etrebroadel,
- Kelaouiñ an dud war an armerzh sokial ha kengret,
- ...

4.3.3 Al liesseurtes sevenadurel (2)

- Kejadenn etre raktresoù sevenadurel ha raktresoù arzel ha pedagogel, kenetre an dud, kenetre remziadoù ha tiriadoù,
- Kemer perzh e deskadurezh an arzoù,
- Lec'h evit an eskemmoù etresevenadurel,
- Doujañ ha harpañ al liesseurtes yezhel,
- ...

Evit derc'hel kont eus an diorren padus e tle bezañ cheñchamantoù bras en aozadur. Ma oar holl obererien ar festivalioù eus pennaennoù an diorren padus ha kengret, neuze e c'haller krediñ e vo aesoc'h dezho kemer perzh er programm oberoù kinniget gant ar festivalioù.

4.3.4 Perzh an obererien hag an arvesterien (1)

- Kelaouiñ ha stummañ obererien hag arvesterien ar festivalioù war pennaennoù an diorren padus ha kengret,
- Kenemouestl an obererien ha kenlabourioù etrezo evit lakaat an oberoù e pleustr,
- Mont en-dro diouzh un demokratelezh-perzhiañ, evit ma vefe kemeret muioc'h a zivizoù a-stroll hag evit ma c'hallfe pep hini bezañ kevatal d'ar re all evit kemer perzh ha reiñ e soñj,
- Reiñ an tu d'an arvesterien da reiñ o soñj,
- ...

4.4. Ober d'an holl dud bezañ en o bleuñv

Evit ma vefe an holl dud en o bleuñv e vez doujet al liesseurtes sevenadurel hag an identelezhioù, evit lezel gant pep hini ar frankiz da vevañ ha da zibab e sevenadur hag e arz. Evel-se e ra ar festivalioù e doare ma vefe an dud en o aez ha ma vefe doujet pep den hag e ziforc'hioù, ne vern petra e vefe perzh an dud en aozadur.

4.4.1 Degemer an arvesterien (1)

- Staliañ ar pezh zo ezhomm evit degemer an holl arvesterien, diouzh ezhommoù kelaouiñ ha stuzioù buhez arbennik zo : lec'hioù a-ratozh evit an dud nammet, treuzdougen azas, lec'hioù kelaouiñ ha reiñ o soñj, ha kement zo,
- Derc'hel kont eus ar riskloù stag ouzh ar gouelioù, dre staliañ gwikefreoù kelaouiñ hag eskemm azas ha kinnig dafar evit diarbenn ha digreskiñ ar riskloù,
- Diorren ur programm hanterourin sevenadurel, evit reiñ an tu d'an holl arvesterien da anavezout kinnigoù arzel ar festivalioù ha da zibab hervez o c'hoant,
- Reiñ an tu d'an arvesterien da vezañ lod ha da gemer perzh e raktres sevenadurel ar festivalioù, dre deurel evezh ouzh an oberoù deuet diwar atiz hiniannoù pe strolladoù,
- ...

Ne c'haller ket lakaat an diorren padus ha kengret e pleustr hep sevel ur politikerezh reizh ha kevatal evit merañ ar c'hoskor. E-ser an oberoù meneget dija e pal ar c'henstagded sokial,

4.4.2 Obererien an aozadur (1)

- Lakaat da dalvezout ar barelezh paotred/merc'hed ha kevatalded ar goprou,
- Stummañ holl obererien ar festival, treuzkas ar ouiziegezh,
- Teurel evezh ouzh modoù merañ ar c'hoskor gant ar burchaserien dibabet,
- ...

4.4.3 L'épanouissement des artistes (1)

- Le respect du travail de l'artiste, de ses droits d'auteurs et sa rémunération équitable,
- La variété des expressions artistiques tant dans le processus de création que de diffusion,
- La découverte et la production d'artistes,
- ...

4.4.4 Les partenaires (2)

En plus d'informer ses partenaires de la démarche engagée pour le développement durable et solidaire, le festival sera attentif à la construction des relations partenariales.

- La construction des échanges en cohérence avec les principes du développement durable et participant à ses finalités,
- Le développement des relations partenariales dans la durée, qui favorise la durabilité des projets,
- ...

4.4.5 Les populations (2)

La prise en compte du respect et du bien être des acteurs s'applique également aux populations autres que les publics.

- La possibilité pour des populations concernées de s'exprimer et de disposer d'une parole et d'une écoute quant à leur vie en tant que citoyen extérieur ou riverain du festival,
- L'information des populations relative à la prise en compte et à l'attention qui est portée à l'environnement extérieur au festival,
- La possibilité de comprendre les dispositifs de l'organisation et la démarche du festival,
- ...

4.5. *Permettre une dynamique de développement suivant des modes de production et de consommations responsables.*

Les consommations du festival sont inhérentes à ses multiples secteurs, à la fois pour répondre aux objectifs de production et pour les besoins logistiques du festival : restauration, boisson, hébergement, transport, communication, promotion, utilisation de matériels divers.

Les festivaliers sont eux aussi amenés à consommer pour satisfaire leurs besoins au sein du festival.

4.5.1 Les achats du festival (1)

- A travers sa politique d'achat et de commande, le festival est en mesure de servir également les 4 objectifs opérationnels précédents.
- La réduction des consommations superflues et des déchets à la source,
- La rationalisation et la centralisation des achats pour éviter les gaspillages,
- La promotion des politiques d'achats issus de l'agriculture ou de l'élevage biologique et/ou éco labellisés et/ou d'achats de produits issus du commerce équitable ou du commerce éthique,
- L'adoption d'une politique d'achats locale et /ou équitable, favorisant le développement de l'économie du territoire,
- L'utilisation de logiciels libres de droits,
- L'utilisation de produits réutilisables, permettant de réduire et de prévenir la production des déchets : gobelets et vaisselles lavables, produits rechargeables, etc.,
- ...

4.5.2 Les fabrications propres du festival (1)

- Concernant les produits réalisés pour les besoins propres de l'événement.
- L'application de critères écologiques à la fabrication des supports de communication,
- La réalisation des autres produits de promotion de manière éco responsable : textiles, cds, objets dérivés,
- L'exigence de codes de bonne conduite et de production de la part des fournisseurs, relativement aux conditions écologiques, sociales, éthiques et de localisation géographique de la production,
- ...

4.5.3 La transparence, expression de la responsabilité du festival (2)

La responsabilité du festival se traduit aussi par l'information dispensée en toute transparence. Cette responsabilité s'exprime à la fois devant les acteurs et les publics et conduit à faciliter la compréhension des modes de production du festival :

- La transparence sur les grands équilibres budgétaires de l'économie du festival qui permettent la description du coût du fauteuil : part de l'autofinancement, des apports extérieurs et répartition des charges, reliées à la fréquentation réelle (payants, gratuits, personnes de l'organisation),

4.4.3 Arzourien en o bleuñv (1)

- Doujañ labour an arzourien, o gwirioù obererien ha reiñ goprou reizh dezho,
- Kinnig oberennoù arzel liesseurt, koulz evit ar c'hrouiñ hag evit ar skignañ,
- Dizoleiñ ha produiñ arzourien,
- ...

4.4.4 Ar gevelerien (2)

Estreget kemenn d'o c'hevelerien o emouestl en diorren padus ha kengret e ray ar festivalioù. Strivañ a raint ivez da aozañ darempredoù keveliñ.

- Krouiñ eskemmoù a vo diouzh pennaennoù an diorren padus hag a sikouro da dizhout ar palioù-se,
- Diorren emglevioù keveliñ war hir-dermen, evit ma pado ar raktresoù,
- ...

4.4.5 Tud ar vro (2)

Estreget ouzh an obererien e vez doujañs hag aket : taolet e vez evezh ouzh buhez an dud zo o chom er vro ivez.

- Reiñ an tu da dud ar vro da lavaret o soñj, da sevel o mouezh ha da vezañ selaouet evel keodedourien diavaez pe o chom tost da dachenn ar festivalioù,
- Reiñ da c'houzout da dud ar vro e vez dalc'het kont eus endro diavaez ar festivalioù ha taolet evezh outañ,
- Reiñ an tu d'an dud da gompren gwikefreoù an aozadurioù ha raktres ar festivalioù,
- ...

4.5. *Reiñ ul lusk diorren a glot gant modoù produiñ ha beveziñ atebek.*

Liammet eo bevezerezh ar festivalioù ouzh o gennadoù liesseurt, ken evit tizhout ar palioù produiñ ken evit bastañ da ezhommoù lec'haveiñ ar festivalioù : predoù, evaj, herberc'h, treuzdougen, kehentiñ, brudañ, implijout dafar a bep seurt.

Tro o devez ar festivalerien da veveziñ ivez, hervez o c'hoant e-pad ar festivalioù.

4.5.1 Prenoù ar festivalioù (1)

Dre o folitikerezh prenañ hag urzhiañ e c'hallont ivez tizhout ar 4 fal pleustrek kent.

Digreskiñ ar bevezerezh n'eo ket rekis hag al lastez adalek ar penn-kentañ,

- Skiantekaat ha kreizennañ ar prenoù evit chom hep foranañ,
- Harpañ ar politikerezhioù prenañ traoù diwar al labour-douar pe ar sevel loened biologel ha/pe ekolabelaet ha/pe produoù a zeu eus ar c'henwerzh reizh pe eeun,
- Degemer ur politikerezh prenañ produoù eus ar vro ha/pe eus ar c'henwerzh eeun, evit diorren an armerzh er vro,
- Implijout meziantoù frank a wirioù,
- Implijout produoù a c'haller adimplijout, evit gallout digreskiñ al lastez pe chom hep produiñ lastez : gobeledoù ha listri a c'haller gwalc'hiñ, produoù adkargadus hag all,
- ...

4.5.2 Traezoù graet a-ratozh evit ar festivalioù (1)

Evit a sell ar produoù graet evit an abadennoù end-eeun.

- Lakaat dezverkoù ekologel e pleustr evit aozañ skoroù kehentiñ,
- Sevel ar produoù brudañ all gant atebegzh ekologel : gwiadoù, cdoù, traezoù deveret,
- Goulenn-groñs ma vo reizh produerezh ar bourchaserien e-keñver doareoù ekologel, sokial, buhezegezhel ar produoù hag e-keñver al lec'h produiñ,
- ...

4.5.3 Bezañ treuzwelus, un doare eus atebegzh ar festivalioù (2)

Sammañ a ra ar festivalioù o atebegzh ivez dre reiñ titouroù hep kuzhat netra. An atebegzh-se a vez lakaet war wel dirak an obererien koulz ha dirak an arvesterien ha talvezout a ra d'an dud da gompren gwelloc'h modoù produiñ ar festivalioù :

- Dre ma embann ar festivalioù kempouezoù bras o budjedoù e c'haller deskrivañ koust pep plas : lodenn an emarc'hantañ, an degasadenoù diavaez ha dasparzh ar c'hargoù, lakaet keñver-ha-keñver gant niver gwirion an arvesterien (plasoù paeet, plasoù digoust, tud eus an aozadur),

- La répartition géographique des fournisseurs et partenaires qui permettent de cartographier l'impact économique et social du festival,
- ...

5. Mise en œuvre de la Charte

5.1. *Les modalités de signature*

Les modalités de signature constituent la démarche à suivre par les festivals préalablement et en vue de leur engagement à mettre en œuvre la Charte des festivals.

Elles précisent les conditions d'adhésion, d'éligibilité et de mise en œuvre des festivals à cette Charte.

5.1.1 Conditions Générales d'Adhésion

La Charte s'adresse à toute structure organisatrice d'un festival en Bretagne, quelque soit sa forme juridique et sa discipline artistique, ayant son siège et ses représentations en Bretagne. L'acceptation de la présente Charte implique l'adhésion du festival signataire aux principes du développement durable et solidaire.

Pour adhérer à la Charte, il suffit que le festival candidat adresse au Comité de pilotage :

- le formulaire d'adhésion dûment complété ;
- une présentation du projet d'avancement du festival dans sa démarche développement durable et solidaire ;
- une lettre de motivation à s'engager dans la Charte.

Le Comité de pilotage se réserve le droit de refuser à tout moment et à tout festival le droit de se prévaloir de l'application de la Charte et/ou de son logo. Ce refus devra être justifié et argumenté.

5.1.2 Conditions d'éligibilité à la Charte

A partir des éléments transmis, le Comité de pilotage validera la recevabilité de la demande au regard des conditions d'éligibilité suivantes :

Respect des réglementations et législations en vigueur

Les festivals respectent le cadre légal en vigueur et en conséquence doivent appliquer l'ensemble des réglementations et législations, notamment sur le respect de la propriété intellectuelle et artistique, le droit du travail, etc (par exemple, en ce qui concerne le spectacle vivant : l'ordonnance de 1945).

Gouvernance

La structure organisatrice du festival ne délègue aucune des responsabilités de direction à toute autre structure. Acteur culturel en spectacle vivant, elle doit être titulaire des licences de spectacles nécessaires à la production et à la mise en place de son événement.

Volonté

Une expérience de trois éditions dans l'application d'actions activant certains principes du développement durable et solidaire est nécessaire.

Toute organisation signataire de la Charte dispose d'un délai de trois éditions pour **définir son Agenda 21** ou tout autre programme d'ensemble, global, cohérent, évolutif et dépassant quelques actions ponctuelles ou disparates.

5.1.3 Rappel des engagements

Selon ses projets et spécificités, chaque festival s'engage sur la méthode :

- à définir et à mettre en œuvre un programme complet et cohérent d'actions concrètes, (ex un Agenda 21), traversant toutes les dimensions de production d'un festival ; celui-ci engageant 1 action minimum par objectif opérationnel, parmi les actions définies comme prioritaires (notées 1) ;
- à établir un calendrier de réalisation du programme en application du principe de progressivité ;
- à mettre en place les conditions d'une évaluation objective et contradictoire sur chaque action ;
- à faciliter toute information et communication vers les partenaires, les publics et populations.

- Dasparzh douaroniel ar bourchaserien hag ar gevelerien evit gallout kartennaouiñ heuliadoù armerzhel ha sokial ar festivalioù,
- ...

5. Lakaat ar Garta e pleustr

5.1. Reolennoù sinañ

Ar reolennoù sinañ-mañ zo da heuliañ gant ar festivalioù a-raok dezho gouestlañ lakaat Karta ar festivalioù e pleustr.

Resisaet e vez ganto an divizoù a ro gwir d'ar festivalioù da emezelañ ouzh ar Garta, d'he sinañ ha d'he lakaat e pleustr.

5.1.1 Penndivizoù Emezelañ

Sellet a ra ar Garta ouzh kement framm a aoz ur festival e Breizh, ne vern petra eo e stumm lezennel hag e ziskiblezh arzel, gant ma vo e sez hag e zileuridigezhioù e Breizh. Kement festival a sin ar Garta-mañ a sav a-du gant pennaennoù an diorren padus ha kengret.

Evit emezelañ ouzh ar Garta e vo trawalc'h d'ar festivalioù kas an teulioù amañ dindan d'ar Poellgor sturiañ :

- ar furmskrid emezelañ peurglokaet ;
- un teuliad evit kinnig raktres ar festival a-benn mont war-raok gant an diorren padus ha kengret ;
- ul lizher evit displegañ perak e fell d'ar festival emezelañ ouzh ar Garta.

Gwir en deus ar Poellgor sturiañ da nac'h, da nep koulz hag ouzh nep festival, ar gwir da fougasiñ gant ar Garta ha/pe gant he logo. Evit nac'h an dra-se e vo ret reiñ digarezhioù hag abegoù.

5.1.2 Divizoù evit kaout gwir da sinañ ar Garta

Gant an elfennoù kaset e ray ar Poellgor sturiañ war-dro degemer ar goulenn diouzh an divizoù meneget amañ da-heul evit kaout gwir da sinañ :

Doujañ ar reolennadurioù hag al lezennoù zo o talvezout

Ober a ra ar festivalioù diouzh ar framm gwirel. Rak-se e tleont lakaat an holl reolennadurioù ha lezennoù e pleustr, en o zouez war an doujañs ouzh ar berc'henniezh speredel hag arzel, gwir al labour hag all (da skouer evit an arvestoù bev : kemenn 1945).

Gouarnerezh

Ar frammoù a aoz ar festivalioù ne c'hell ket kargañ nep framm all bennak da sammañ an atebegzhioù ren. Ar frammoù, evel obererien sevenadurel an arvestoù bev, a rank bezañ ganto an aotreoù zo ezhomm evit produiñ ha sevel o abadennoù.

Youl

Ret eo d'ar festivalioù bezañ bet aozet teir gwech, en ur lakaat e pleustr oberoù a bled gant pennaennoù zo eus an diorren padus ha kengret.

Tri dalc'h eo an termen roet da gement aozadur a sin ar Garta evit krouiñ e Agenda 21 pe nep programm all, hollek, kempoell, emdroüs hag a ya en tu all d'un nebeud oberoù diseurt hag aozet bep an amzer.

5.1.3 Emouestloù ar sinerien

Diouzh e raktresoù hag e zibarderioù e ouestl pep festival heuliañ an hentenn-mañ :

- termenañ ha lakaat e pleustr ur programm oberoù fetis, klok ha kempoell, (un Agenda 21, da skouer), a bled gant an holl arvezioù eus produerezh ar festival ; hemañ a ouestl seveniñ d'an nebeutañ 1 ober dre bal pleustrek a vo dibabet e-touez an oberoù merket evel oberoù pennañ (merket 1) ;
- sevel un deziadur eus sevenidigezh ar programm evit ober an traoù a-nebeudoù evel merket da bennaenn ;
- sevel divizoù evit gallout priziañ pep ober en un doare objektivel ha lavar-dislavar ;
- aesaat an oberoù kelaouiñ ha kehentiñ davet ar gevelerien, an arvesterien ha tud ar vro.

Le festival signant la Charte s'engage sur la méthodologie du travail en commun :

- à contribuer aux travaux collectifs ;
- à mutualiser son expérience ;
- à s'inscrire dans une amélioration continue sur la durée ;
- à suivre le protocole d'évaluation défini ci-après.

5.1.4 Engagements dans la mise en œuvre de la Charte

Tout festival signataire devient membre du Comité de pilotage de la Charte.

Le principe de mutualisation liée à la création d'un collectif suppose la solidarité et la complémentarité de chacun devant les actions et décisions : cela impose alors la définition d'une méthodologie commune à tous, d'une subsidiarité dans la répartition du travail, d'une validation collective sur les avancées.

Pour guider les festivals dans la mise en œuvre des objectifs de la Charte, les « fiches actions » constituent des outils pratiques et illustrent une méthode expérimentée dans le contexte festival.

Une fois adoptée, la Charte sera donnée à la connaissance de tous les acteurs du festival.

5.1.5 Signataires

La signature de la Charte est validée par le représentant légal de la structure organisatrice du festival, ayant pouvoir de signature, ou par une personne autorisée par écrit à le remplacer temporairement.

La structure désigne librement une ou des personnes au suivi de la mise en œuvre de la Charte. Celles-ci devront apporter une participation sincère et active à la méthodologie du travail en commun de la Charte.

5.1.6 Utilisation du Logo

L'adhésion à la Charte, une fois définitive et rendue par le Comité de pilotage, confère à la structure signataire la possibilité d'utiliser le logo « Charte des Festivals engagés pour le développement durable et solidaire en Bretagne » sur les supports de communication, uniquement dans le cadre du festival.

Cette possibilité cesse automatiquement lorsque le festival signataire cesse d'appliquer les dispositions de la Charte ou des conditions générales. L'adhésion ne confère pas au festival le droit d'utiliser le logo pour tout autre usage et pour toute autre période.

5.2. Le protocole d'évaluation

Il est établi sur la base des 5 objectifs opérationnels et de leurs indicateurs.

5.2.1 Fonctions de l'évaluation

L'évaluation correspond à la présentation du programme Agenda 21 du festival et à sa restitution pour chaque édition. Par conséquent, elle met en évidence le déroulement des actions et le degré d'application de la Charte dans le respect des principes du développement durable et solidaire.

La démarche d'évaluation inclut une appréciation des effets directs et indirects du projet mené.

Le développement durable et solidaire visant à l'amélioration des systèmes de production et d'organisation, l'évaluation intègre par ailleurs comme paramètre l'adaptation pragmatique aux conditions réelles et aux évolutions du secteur.

Les festivals pouvant se trouver à des étapes différentes du processus, l'évaluation se formalisera au cas par cas et contradictoirement avec les structures productrices des événements.

L'amélioration continue déterminera la prolongation ou non de son engagement à la Charte.

S'inscrivant dans l'engagement de travail en commun, l'évaluation relève de la mutualisation des expériences et vient répondre à l'amélioration continue et à la transparence de l'information.

5.2.2 Modalités d'évaluation

Evaluation annuelle

Chaque signataire conduira l'évaluation de son Agenda 21 pour chaque édition selon ce protocole d'évaluation.

Ar festivalioù sinet ar Garta ganto a ouestl ober diouzh an hentenn kenlabour-mañ :

- kemer perzh el labourioù a-stroll ;
- boutinaat o skiant-prenet ;
- gwellaat ingal ha war hir-dermen ;
- heuliañ ar protokol priziañ displeget amañ da-heul.

5.1.4 Emouestloù evit lakaat ar Garta e pleustr

Kement festival a sin a zeu da vezañ ezel eus Poellgor sturiañ ar Garta.

Pennaenn ar boutinaat zo liammet ouzh krouidigezh ur strollad a dalvez e rank pep hini bezañ kengret hag e kenemglev gant ar re all pa vez anv da seveniñ oberoù ha da gemer divizoù : setu perak e tleer sevel un hentenn zo boutin d'an holl, dasparzhañ al labour en doare ma vefe eilerien atav, lakaat ar strollad da dalvoudekaat an araokadennoù.

Evit sikour ar festivalioù da lakaat e pleustr palioù ar Garta ez eus bet savet « fichenoù oberoù » pleustrek hag a ziskouez un hentenn arnodet er festivalioù.

Ur skouerenn eus ar Garta a vez roet da holl obererien pep festival ur wezh degemeret ar Garta gantañ.

5.1.5 Sinerien

Talvoudekaet e vez sinadur ar Garta gant an dileuriad lezennel eus ar framm a aoz ar festival hag en deus gwir da sinañ, pe gant un den aotreet dre skrid da gemer e lec'h da c'hortoz.

Dieub eo pep framm da zibab un den pe veur a hini da heuliañ an oberoù da lakaat ar Garta e pleustr. Ar re-se a ranko kemer perzh a-wir-galon hag a-youl e hentenn kenlabour ar Garta.

5.1.6 Implijout al Logo

Ur wezh kadarnaet ha degemeret o emezeladur ouzh ar Garta gant ar Poellgor sturiañ, e c'hall ar frammoù sinerien ober gant al logo « Karta ar Festivalioù engouestlet en diorren padus ha kengret e Breizh » war ar skoroù kehentiñ, da-geñver ar festivalioù hepken.

Difennet e vo implijout al logo kerkent ha ma paouezo ur festival da lakaat e pleustr diferadurioù pe penndivizoù ar Garta. An emezeladur ne ro ket gwir d'ar festivalioù da implijout logo ar garta evit un dra bennak all nag evit ur prantad all.

5.2. Ar protokol priziañ

Diazezet eo war 5 pal pleustrek ha war o zitourennoù.

5.2.1 Kargoù ar priziadur

Evit ar priziadur e vez goulennet digant ar festivalioù kinnig o frogramm Agenda 21 hag e rentañ da bep dalc'h. Evel-se e weler penaos eo bet kaset an oberoù war-raok ha pegen pell eo bet ar festivalioù o lakaat ar Garta e pleustr evit doujañ da bennaennoù an diorren padus ha kengret.

Priziet e vez efedoù eeun ha dieeun ar raktresoù kaset da benn.

Dre ma talvez an diorren padus da wellaat ar reizhiadoù produiñ hag aozañ e sell ar priziadur ivez ouzh an doare pleustrek d'e azasaat ouzh ar gwirvoud hag ouzh emdroadurioù ar gennad.

Dre ma c'hall ar festivalioù bezañ erruet da bazennoù disheñvel eus an argerzh, e vo priziet pep festival unan hag unan hag en ur mod disheñvel gant frammoù produiñ an abadennoù.

Ne vo astennet emouestl ar festivalioù er Garta nemet ma vez kendalc'het da zegas gwellaennoù ganto.

Ar priziadur, ha zo deuet diwar ar c'hoant da genlabourat, a dalvez da voutinaat skiant-prenet pep hini, da genderc'hel da wellaat an traoù ha da reiñ keleier treuzwelus.

5.2.2 Reolennoù priziañ

Priziadur bloaziek

Pep siner a ray war-dro priziañ e Agenda 21, da bep dalc'h, diouzh ar protokol priziañ-mañ.

Evaluation partagée

Pour accompagner l'évaluation, le festival favorisera l'accueil et la présence d'un ou plusieurs autres festivals signataires au moment de son événement. Ce temps partagé d'observation et de confrontation à la réalité éphémère du festival cherchera à privilégier une relation d'échange constructive à travers le partage des expériences et des conseils.

A chaque étape de la démarche, le festival communiquera les documents suivants à l'attention du comité de pilotage pour la validation du respect de la Charte.

A la demande de signature et d'engagement à la Charte :

- L'état d'avancement de la démarche de développement durable et solidaire,
- Les objectifs de la démarche développement durable du festival.

A la définition du programme complet et cohérent d'actions concrètes, puis avant chaque édition (au moins 2 mois avant le festival) :

- Le programme complet et cohérent d'actions concrètes du festival, incluant le calendrier de progressivité,
- Le programme d'actions défini pour la présente édition.

Au bilan de l'édition du festival (dans les 3 mois suivants) :

- Le bilan annuel des actions inscrites à l'Agenda 21 dans le cadre de l'édition, qui rapportera :
 - o le déroulement des réalisations effectives,
 - o les résultats collectés par action à partir des indicateurs,
 - o un budget réalisé du programme complet et cohérent d'actions concrètes,
 - o une analyse objective de l'évolution concrétisée,
 - o les perspectives d'évolution et d'amélioration.

Le comité de pilotage peut demander des éléments ou arguments complémentaires, nécessaires à la démarche d'évaluation.

Validation réciproque

Le comité de pilotage se réunit au cours de 2 sessions annuelles pour examiner les dossiers.

Le comité de pilotage vérifie:

- que les documents sont transmis pour chacune des étapes,
- que les informations transcrites correspondent aux objectifs de la Charte,
- les évolutions en termes de progressivité et d'amélioration des actions.

Le comité de pilotage valide la prolongation ou le retrait de l'engagement du festival à la Charte.

Outils supports :

- la Charte des festivals engagés pour le développement durable et solidaire,
- les fiches pratiques qui définissent le processus expérimenté de mise en œuvre,
- les indicateurs d'évaluation,
- le tableau des indicateurs environnementaux, « Avec l'aimable autorisation de la Région Poitou-Charentes et de l'Ademe - <http://www.poitou-charentes.fr/fr/environnement/eco-manif> ».

5.3. Suivi de la mise en œuvre

Le suivi de la mise en œuvre de la présente Charte est assuré par le Comité de Pilotage dont la composition, les modalités de fonctionnement et le mode de participation sont présentés dans la « Convention d'accompagnement de la Charte des festivals engagés pour le développement durable et solidaire en Bretagne ».

Priziadur rannet

Evit aesaat ar priziadur e vo strivet gant pep festival da zegemer, e-pad an abadenn aozet gantañ, ur festival pe meur a hini all o deus sinet ar garta. E-pad an amzer-se, ma vo studiet ha keñveriet gwirvoudoù berrbad ar festivalioù, e vo klasket magañ un darempred yael dre eskemm skiant-prenet ha kuzulioù.

Da bep pazenn eus an argerzh e ranko ar festivalioù reiñ an teulioù meneget amañ da-heul d'ar poellgor sturiañ, evit talvoudekaat o emouestl er Garta.

Pa vez goulennet sinañ hag emouestlañ er Garta :

- Stad araokaat an argerzh evit an diorren padus ha kengret,
- Paliou ar festivalioù evit an diorren padus.

Pa vez sevenet programm klok ha kempoell an oberoù fetis, hag a-raok pep dalc'h (2 viz a-raok deroù ar festivalioù d'an nebeutañ) :

- Programm klok ha kempoell an oberoù fetis raktreset gant ar festivalioù, hag an deiziadur pazenn-ha-pazenn ivez,
- Ar programm oberoù termenet evit an dalc'h zo da zont.

Pa vez graet ar bilañs eus dalc'h ar festivalioù (e-kerzh an 3 miz war-lerc'h) :

- Bilañs bloaziek an oberoù merket en Agenda 21 e-pad an dalc'h, evit danevellañ :
 - o mont en-dro ar sevenidigezhioù fetis,
 - o an disoc'hoù dastumet evit pep ober diwar an titourennoù,
 - o ur budjed eus programm klok ha kempoell an oberoù fetis,
 - o un dielfennadur objektivel eus an emdroadur deuet da benn vat,
 - o an traoù a c'hallfed ober evit emdreiñ ha gwellaat.

Elfennoù pe arguzennoù ouzhpenn a c'hall bezañ goulennet gant ar poellgor sturiañ evit gallout priziañ mat.

Talvoudekadur keveskemm

En em vodañ a ra ar poellgor sturiañ div wezh ar bloaz evit studiañ an teulioù.

Gwiriañ a ra ar poellgor sturiañ :

- eo bet roet an holl deulioù da bep pazenn,
- e klot an titouroù skrivet gant paliou ar Garta,
- eo bet gwellaet an traoù a-nebeudoù.

Gant ar poellgor sturiañ e vez talvoudekaet astenn pe nullañ emouestl ar festivalioù er Garta.

Binvioù harp :

- karta ar festivalioù emouestlet en diorren padus ha kengret,
- ar fichenoù pleustrek termenet enno an argerzh arnodet evit lakaat ar garta e pleustr,
- an titourennoù priziañ,
- taolenn an titourennoù evit an endro, « *Gant aotre hegarat ar Rannvro Poitou-Charentes hag an Ademe - <http://www.poitou-charentes.fr/fr/environnement/eco-manif> ».*

5.3. Heuliañ sevenidigezh ar paliou

Sevenidigezh ar Garta-mañ a vez heuliet gant ar Poellgor sturiañ. Reolennoù emezelañ, mont en-dro ha kemer perzh er poellgor zo kinniget e « Kenemglev ambroug Karta ar festivalioù engouestlet en diorren padus ha kengret e Breizh ».

Conseil régional de Bretagne
Kuzul-rannvro Breizh

ADEME Bretagne
ADEME Breizh

Conseil général du Morbihan
Kuzul-departamant ar Mor-Bihan

Jean-Yves LE DRIAN
Président du Conseil régional de
Bretagne
Prezidant Kuzul-rannvro Breizh

Gilles PETITJEAN
Directeur régional Bretagne
Rener rannvroel evit Breizh

Joseph-François KERGUERIS
Président du Conseil général du
Morbihan
Prezidant Kuzul-departamant ar
Mor-Bihan

Cap L'Orient
Kab an Oriant

Rennes Métropole
Roazhon Meurgêr

Ville de Rennes
Kêr Roazhon

Norbert METAIRIE
Président de Cap L'Orient
agglomération
Prezidant tolpad-kêrioù Kab an
Oriant

Daniel DELAVEAU
Président de Rennes Métropole
Prezidant Roazhon Meurgêr

Daniel DELAVEAU
Maire de Rennes
Maer Roazhon

Les festivals signataires

Astropolis

Festival de Cinéma Douarnenez
Gouel Sinema Douarnenez

Festival du Bout du Monde

Matthieu Guerre Berthelot
Président d'Astropolis
Prezidant Astropolis

Brigitte Mouchel
Présidente du Festival de Cinéma
de Douarnenez
Prezidantez Gouel Sinema
Douarnenez

Jacques Guérin
Directeur de Quai Ouest Musiques
Renner Quai Ouest Musiques

Festival du Chant de Marin
Gouel Kan ar Vartoloded

Festival Fisel

Festival Interceltique de Lorient
Emvod ar Gelted an Oriant

Pierre Morvan
Président du Festival du Chant de
Marin
Prezidant Gouel Kan ar
Vartoloded

Yves Pavec
Président de la Fiserie
Prezidant ar Fiseled

Noël Couëdel
Président du Festival
Interceltique de Lorient
Prezidant Emvod ar Gelted an
Oriant

Festival Panoramas

Festival des Vieilles Charrues
Gouel an Erer Kozh

Tanguy Bizien
Président de Wart
Prezidant Wart
P.O. Eddy Pierres

Jean Philippe Quignon
Président du Festival des Vieilles Charrues
Prezidant Gouel an Erer Kozh

Le Grand Soufflet

Les Bordées de Cancale

Les Rencontres Trans Musicales
Emgavioù an Trans Musicales

Christian Druart
Président du Grand Soufflet
Prezidant ar Grand Soufflet

Daniel Salmon
Président de Phare Ouest
Prezidant Phare Ouest

Jean Marc Nicolas
Président de l'Association Trans
Musicales
Prezidant Kevredigezh an Trans
Musicales

Les Tombées de la Nuit
Gouelioù ar Serr-noz

Quartiers d'Eté

Rock 'n Solex

Oleg Kovalsky
Président des Tombées de la Nuit
Prezidant Gouelioù ar Serr-noz

Jean Lemesle
Président du CRIJ Bretagne
Prezidant KRTY Breizh

Alexandre Fauquet
Président de Rock'n Solex
Prezidant Rock'n Solex

Travelling

Un Soir à St Nolff

Laurent Perraudeau
Président de Clair Obscur
Prezidant Clair Obscur

Christophe Mangan
Président d'Au Coin du Bois
Prezidant Au Coin du Bois



engagés pour le développement durable et solidaire en Bretagne

